

DISPUT

COMPOSET A NEVEZ

ENTRE

UR C'HEREER,

HAC

UR BOTOER COAT.

Var un ton nevez.

Mar gallan gont ar fecon, e teun da rima
Eun disput a neve flam, d'en em divertissa,
Savet entre ar C'hereer hac ar Botoer coat ;
Pa vent crog en eur boutail int daou pot dilicat.

O daou o deus prometet e mige digante,
Goude formi eun disput excellant entrese ;
Eun doucen vio fritet hac eun tam bara guen,
Hac eur banne da effa en fin ar ganaouen.

Mar be glebiet an anehen ar bombard a zono,
A zilao gant parlet eun darn a resono,
Vit ho lacât da zisput an eil oc'h e guile
Ha neu pas rima netra nemert ar virione.

Er gouan ec'h intantan, eme ar Botoer coat,
E me a zeu da viscan treid an dud dilicat,
Ha te Quereer infam, gant ta votou ler,
A zigac ar c'hlenvejo hac eun nombr a yizer.

Eun tam eo istimet huihoc'h ma etat
Evit n'en deo da hini, pot ar Botou coad ;
Ma rancefe beajerrien bale gant sorgello,
E vent eun anter hirroc'h oc'h ober campagno.

Evit prepari'n douar da lakat an trevat
Eo eun dra necesser cavet eur botou coad ;
Ne voeler den o palat er parc gant botou ler
Ha c'hoas e fell dit laret ne n'on qet necesser.

Goud a ran eo ar botou coad a gonserv ar yec'het
Hac a brepar an douar evit lacat an ed,
Evel ma c'her da redee er parc gant o vejo
E scanvoc'h ar botou ler evit eur sorgello.

Pa deui an 'erc'h, hac ar scorn, hac ar gouan kalet,
E ranko ar C'hereer paca e vinaouet,
Ha me doucho an arc'hant partout er marc'hajo
Ha te a sello ouzin ha digor da c'heno.

Pa erruo ar mis meus hac an neve amzer,
Da visea an habijo brao hac ar boto ler
Neuze na vo istimet netra ar boto coat;
Ur boto ler da vale a so traou dilicat.

Alies e renq'es mont da dy ar c'hivijer
Ha na pe nemet tri scoet pe eun tri scoet anter,
Ha me laca assembles bete c'huec'h uguent scoet
Da brena ar c'hoat boto evit ar baysantet.

Goel a ze dit, ma mignon, pa teus eur bern arc'hant;
An neb o deus nebeutoc'h a vev honestamant.
Me a deb q'ic ha zouben ma yod da greis-de :
Ordinal ec'h intentant on bevet couls a te.

Poent eo din finissa rac an nos a dosta,
Hac an hostis a jeno pa na effomp netra,
Hac à roi din hon c'honje, Coader ha Q'ereer,
Da bartian deus he dy ha mont da gaet ar guer.

Ebars en hostaleri e vo rezonio,
Disput entre ar vignonet ha chass-bleo evecho;
Ar c'hoste crea c'hone ebars en peb affer,
Mar q'eres ni a velo, eme ar C'hereer.

Goude leis cov e crogjont vel daou ghy animet
Ha stagan d'en em gannan evel tud malisset,
Q'en ha ranq'as an hostis q'emer e vas ribot,
Ha sq'ei voar zin discregui en faëçon ma oant crog.

Goulennomp eur chopinat d'en em dispartia :
An hostis on servijo mar deuomp d'e bea,
Hac evomp pep a vanac'h e fin ar ganaouen;
An oll a ranc caout boto pe vale dierc'hen.

An hini en eus rimet an disput dilicat,
Savet entre eur C'hereer hac eur Botoer coat,
En eus gret meur a hini, e hano *Yan ar Goen*,
Hac a veler ordinal en fin ar ganaouen.



DISPUT

COMPOSET A NEVEZ

ENTRE

UR C'HEREER,

HAC

UR BOTOER COAT.

Var un ton nevez.

Mar gallan gout ar fezon, e teuin da rima
Eun disput a nevé flam, d'en em diverfissa,
Savet entre ar C'hereer hac ar Botoer coat ;
Pa vent crog en eur boutail int daou pot dilicat.

O daou o deus prometet e mige digante,
Goude formi eun disput excellant entresse ;
Eun doucen vio fritet hac eun tam bara guen,
Hac eur banne da effa en fin ar ganaouen.

Mar be glebiet an anchen ar bombard a zono,
A zilao gant parfeti eun darn a resono,
Vit ho lacât da zisput an eil oc'h e guile
Ha neu pas rima n'etra nemert ar virione

Er gouan ec'h intentan, eme ar Botoer coat,
E me a zeu da viscan treid an dud dilicat,
Ha te Quereer infam, gant ta votou ler,
A zigac ar c'hlenvejo hac eun nombr a yizer.

Eun tam eo istinet muelloc'h ma etat
Evit n'en deo da himi, pot ar Botou coad :
Ma ranfe beajerrien bale gant sorgello,
E vent eun anter hirroc'h oc'h ober campagno.

Evit prepari'n douar da lakat an trevat
Eo eun dra necesser eavet eur botou coad,
Ne voeler den o palat er parc gant botou ler
Ha c'hoas e fell dit laret ne n'on qet necesser.

Goud a ran eo ar botou coat a gonserv ar yec'het
Hac a brepar an douar evit leat an ed,
Evel ma c'her da redeo er parc gant o vejo
E scanvoc'h ar botou ler evit eur sorgello.

Pa glevas quement-se, ar paour quez Vran chagrin,
 Lavaras d'al Louarn, va fot, te so bed fin ;
 Mes evit eur vec'h al, ne lesin quet biquen,
 M'en assur did, Louarn, dibet va fourmajen.
 Var ton an tra la la la, etc.

KENTEL.

Cetu eun avis mad var ben ar chanson-ma ;
 Vranet coz pe youanc, silouët tout brema :
 Mar carit ar fourmaj, pa debfot an ezan,
 Ne ganit quet neuze, chaquit atao nean.
 Var ton an tra la la la, etc.

PARC AR VINGLEUZ.

Voar eun ton da ober.

E pad an de p'lec'h voach chomet,

Autrou quez Bourjet,

E parc Vingleuz an Daouniet,

Mignonet din, mignonet,

E parc Vingleuz an Daouniet.

Pehini meuz bet prenet.

Euan petra so be gret,

Autrou quez Bourjet

Grâc dan oll asistantet

Mignonet din, mignonet,

Grâc dan oll assistantet

Ar parc so bed difonset.

Dre sur houi so goal caret,

Autrou quez Bourjet

Pa so deut cals a dud vad,

Do sicour tout a galon vad,

Evit netra da labourat

En o camannan Rosangoal.

Ar zon-ma neus composet

An autrou Bourjet

En henor he vignonet

Pere tout vitan deuz posgnet

Da veurz, seiz varnuguen

Mil eiz cant tregont ac uguen.

E ty Ar Goffik, e Lanluog.